

KANNADIG

YMBORTHRE'N

Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 61 Mae-Mezheven-Gouhere 2009 Priz : 2 €

Emgannoù Konkwered

Konkwered, kumun eus kanton Gwenvenez-Penfaw, en deus e blas en Istor Breizh en abeg da zaou emgann a c'hoarvezas war e diriad, unan e 981, unan all e 992, hag o devo diouzh tuioù zo ur pouez ha ne voe ket dister evit dazont Breizh d'ar c'houlz-se, evel Dugelezh dizalc'h. Diouzh un tu all e c'hell an emgannoù-se bezañ bet ur rakskeudenn d'ar c'hevezerezh a vez bepred etre kêrioù Naoned ha Roazhon. Setu, dre vras, dre betore amveziadoù¹ e c'hoarvezas an traoù.

Alan Barveg, dug Breizh, an hini a stourmas kalonek evit dieubiñ hor bro diouzh aloubidigezh an Normaned, a varvas e 952. Lezel a rae ur pennhêr yaouank, Drogon, a fizias da ward e vreur-kaer, Thibault an Trucher, Kont Chartrez. Hemañ a soñjas dreist-holl ober un taol mat eus ar gwarez a oa bet fiziet ennañ. Eurediñ a reas intañvez Alan Barveg da Foulk ar Mat, Kont Anjev, en ur lezel dezhañ ar bennaotrouniezh war an hanter eus a Vreizh. Ne viras evitañ nemet ar bennaotrouniezh war Roazhon hag an Domnonea ; Juhel Beranger, kont Roazhon, ha Wikohen, Arc'heskob Dol, a gedanavezas an emglev-se. E 958 e varvas Drogon yaouank, ha Kont Anjev, tebet bezañ un den mat, ne voe ket estren d'e varv. Mervel a reas d'e dro e 960. HOEL, mab bastard Alan Barveg, bet kedanavezet Kont gant an Naonediz, a fellas dezhañ ademprañ Dugelezh Vreizh evitañ. Edo Kontelezh Roazhon etre daouarn Juhel Beranger, diskennad Gurwant, mabeg Erispoe roue Breizh, met gwan e oa e aotrouniezh dre ma oa dindan dalc'h Wikohen

arc'heskob Dol, met ivez mestr Domnonea. Pa varvas Juhel e 970, e vab Konan, lezanvet an Tort, a zeuas a-benn d'en em zistagañ diouzh krog Wikohen, da ober kedanavezout e aotrouniezh war Kontelezh Roazhon, hag e reas e vennozha lakaat e bennaotrouniezh war an dugelezh a-bezh, diogel ma oa eus harp ar gonted breizhat all, na felle ket dezho kaout Hoel da Zug, rak daoust da vrud vat e dad, an Dug aet da Anaon, e oa ur bugel bet ganet er-maez an dimeziñ. Evel-se, an daou di, hini Roazhon hag hini Naoned, a oa o vont d'en em gannañ.

Keit ha ma vevas Hoel, Kont Naoned, ne voe nemet krogadoù ha skrapadegoù war tiriad an div gontelezh. Hogen Hoel a varvas e kerzh un hemolc'h nepell diouzh Naoned, hag e redas ar vrud, dre ar gêr, e oa bet lazhet dre dreitouriezh, gant un den kaset gant Konan. Gwir pe gaou, an dra-se a roe dreist-holl an dro da adenaouiñ ar gouvrezel a-enep Konan. Ne leze Hoel nemet daou vugel yaouank. An Naonediz a zibabas, evel penn nevez, Gwereg breur Hoel hag eñv ivez mab bastard da Alan Varveg. Hemañ evit dialañ e vreur a yeas da zrastañ douaroù Konan, betek dindan mogerioù Roazhon. Gant nerzh ez enebas Konan en ur zifourkañ eus Roazhon gant un armead postek hag e tizarbennas an alouberion er-maez Kontelezh Roazhon. Neuze e kinnigas Konan da Wereg reizhañ an dizemglev etrezo en un emgann renket, en ul lec'h divizet hag asantet gant an daou gamp. A-du e voe Gwereg. Bez' e voe an emgann kentañ, e 981, war lanneier

¹ Amveziadoù : *circumstances*.

ec'hon Konkwered.

Bez' e oa Brezhoned en daou gamp, hogen diavaezidi ivez. E-barzh kamp Konan e oa ur strollad Normaned, hag e-barzh hini Gwereg Anjeviz, ha zoken muioc'h a Anjeviz eget a Naonediz, rak kronik ar Menez Mikael, unan eus ar re wellañ eus re e amzer, ne gomz nemet eus Anjeviz en emgann-se a-enep Konan. Garv e voe an emgann, ha kalz tud a varvas diouzh an daou du. Piv a c'hounezas ? Hervez kronikoù an amzer-se, lakaet er-maez hini Angers, e voe Konan, met gloazet grevus e voe en un dorn hag ur vrec'h, hag en abeg da se ne c'hellas ket tennañ gounid eus e drec'h. Distreiñ a reas da Roazhon gant e arme ha Gwereg a reas heñvel etrezek Naoned. War pezh a hañval e chomas an emgann-se, garv ha marvus-kenañ, diefed war heuliad an darvoudoù. Koulskoude en devoe e bouezusted, en ur rediañ an daou enebour da chom sioul e-pad ur pennad amzer, e-pad c'hwec'h vloaz d'an nebeutañ.

Er bloaz 987 ez adkrogas Gwereg da argadennaouiñ e bro Roazhon, kement ha klask anavezout galloudezh e enebour war an dachenn, en ur c'hortoz ar skorad bet gouestlet dezhañ gant dug Anjev ; hogen e keit-se e varvas hemañ, ha Gwereg d'e dro diwar gleñved, er bloaz 988. Ar wech-mañ c'hoazh e redas ar vrud ne oa ket bet naturel marv Gwereg, a vije bet diwadet gant ul lañsetez pistriet, gant e vezeg an Abad Redon, gopret gant Konan. Hep mar ebet e tlee bezañ faos an dra-se, rak sebeliet e voe en abadti Redon.

Bez' e leze Gwereg ur mab yaouank c'hwec'h vloaz, Alan. E vamm, Aremburge, plac'h a benn hag a galon, a c'houarnas Kontelezh Naoned en e anv, hogen Alan yaouank a varvas daou vloaz war-lerc'h e dad. Ne chome eus lignez Alan Varveg nemet daou vugel eus Hoel : Judikael hag Hoel, met bugale bastard e oant, neuze bugale diwirioù. Neuze e c'hellas Konan dont da Naoned hep na vije enebet outañ. Staliañ a reas ur gwarnizon er c'hastell, gwellaat difennoù ar gêr, ha lakaat sevel un eil kastell er Bouffay gant un tour bras, rak doujañ a rae e c'hellfe dont en-dro Kont Anjev a felle dezhañ kaout a-nevez ar gwirioù pennaotrouniezh war Kontelezh Naoned en devoa bet Foulk ar Mat p'en devoa bet gwarez Dregon yaouank. An degouezh kentañ a voe an hini mat.

Un eontr a-berzh mamm d'ar gonted Hoel ha Gwereg, a yeas da gaout Foulk Nera, Kont Anjev

nevez, en ur c'houleñ outañ argas Konan eus Kontelezh Naoned, evit lakaat en e lec'h Judikael yaouank, mab hemañ ar C'hont Hoel – Doue d'e bardono – hag eñv, Foulk Nera, a vije kedanavezet evel pennaotrou. Diouzhtu ez asantas Foulk Nera hag e penn e arme e teuas da lakaat seziz war Naoned, hogen ar gwarnizon a zalc'has penn gant berzh, skoazellet tamm pe damm gant poblañs Naoned a groge da zisfiziout. War an taol e tistroas Foulk Nera da Angers da gerc'hat skoazelloù. Er c'heit-se, Konan a oa bet lakaet war evezh, a zeredas gant un arme kreñv a-walc'h, a oa o lakaat sevel er Vro-Wereg, rak santout a rae e klaskfe an Anjeviz, deiz pe zeiz, ober un taol all war Naoned. Foulk Nera, lakaet war evezh d'e dro, ouzh fiñvadenoù Konan, e-lec'h distreiñ da Naoned, a zaeas anezhañ war an hevelep lanneier, re Konkwered, o devoa gwelet emgann 981. Bez' e voe eil emgann Konkwered, ar 27 a viz Mezheven 992 e oa.

Ar Vrezhoned, o c'houzout edo nerzh an Anjeviz dreist-holl en o marc'hegerezh niverus ha galloudek a ijinas un dro-widre evit herzel outo. A-raok d'o enebourion degouezhout e kleuzjont war al lanneg foziou hir, ledan ha don, ha warno e lakajont klouedoù goloet gant raden o devoa troc'het war al lanneg hec'h-unan, rak e-pep lec'h e kreske diouto. Peurvat e oa an touellaozadur. E diadrenv ar foziou-se, ar Vrezhoned en em aozas e stumm-difenn, o tiskouez sklaer e oant mennet da sparlañ an hent d'o enebourion, met en ur lezel da grediñ ne vijent ket ar re gentañ da dagañ rak gellout a rae c'hoazh an Anjeviz ober hanter-dro ha distreiñ d'ar gêr. Bez' e arc'hwelas an taol-gwidre ; krediñ a reas an Anjeviz ne oa ket gwall-asur ar Vrezhoned, o douetiñ war o nerzh, neuze, da zaoulamm ruz o marc'hoù ez en em strinkjont outo, o goafioù gouzizet, en un arsailh estlammus, en ur soñjal e rafent ul lazhadeg spontus er renkadoù e-tal dezho. Hogen gwall stignoù ar Vrezhoned a arc'hwelas en un doare peurvat. Kouezhañ a reas an holl skouadrennoù eus al linennoù kentañ er foziou, kezeg ha marc'hegerion an eil re dreist d'ar re all, mell-divell, flastret, mouget, mac'het, en un dizurzh dreistfaltazi.

Istor Richer a lavar deomp e voe ugent mil Anjevad evit koll o buhez en doare-se, hogen sklaer ez a kalz re bell. Koulskoude, en argadeg-se eus a-berzh ar varc'hegerezh anjevat, e c'heller tebiñ² aes a-walc'h mar kouezhas ar skouadrennoù kentañ er foziou, e voe lazhet gant

² Tebiñ : *supposer, supputer.*

ar Vrezhoned ar varc'hegerion a zeuas a-benn d'en em dennañ diouzh ar gwall foziou-se, pe ne voe ket niverus ar re en em dennjont dibistig. Pa welas eil strollad ar skouadrennoù anjevat ar gwallreuz c'hoarvezet d'ar re gentañ, e reas hanter-dro hag e tec'has d'an daoulamm ruz hep mui gortoz, ha Foulk Nera a dec'has ivez, ha buanoc'h c'hoazh eget e varc'hegerion, o soñjal hepken en e vuhez da saveteiñ.

Kerkent en em daolas ar Vrezhoned war-lerc'h an Anjeviz, evit ober dezho tremen o c'hoant da zont en-dro. En o fenn edo Konan, hag e lakaas kement a virvidigezh en e hemolc'h m'en em gavas troc'het diouzh peurrest e arme gant tri eus e soudarded hepken. Skuizh divi ha dour-c'hwez-holl gant ar wrez a rae - ar 27 a viz Mezheven e oa -, pa verzas ur c'hoadig. Divizout a reas ober un arsav hag e skeud ar gwez en em lakaas. Hag evit bezañ muioc'h en e aez e lamas e hobregon. Edo aze, hep disfiz, pa voe gwelet hag anavezet gant ur strollad Anjeviz war dec'h, kollet er ploue. Sailhañ a rejont warnañ hag e lazhjont anezhañ hep dezhañ gellout en em zifenn.

Dre an taol reuzeudik-se, e teue disoc'h an emgann da gemmañ evit ar Vrezhoned. O klevout e oa bet lazhket Konan en em zivandennas ar Vrezhoned hag e paouezjont gant an hemolc'h. An Anjeviz a dec'he evel tud dianket en em adstrolljont ha Fouk Nera a reas e zigor e kêr Naoned evel trec'hour. Gwarnizon Konan en em zaskoras pa zeskas e oa marv e aotrou.

Foulk Nera a reas kedanavezout Judikael evel pennhêr kontelezh Naoned, e gwarez e eontr Hemon betek e oad-gour, hag eñv, Foulk Nera, pennaotrou ar gontelezh anvet-se. Hogen an traoù ne zlee ket chom pell evel-se. Kont galloudek Chartrez, hag a oa kevredad Konan, a reas daoulagad du ouzh e amezeg Kont Anjev pa welas e kreskfe e c'halloudezh hag e levezon. War zigarez dialañ Konan, e reas outañ ur brezel stourmata a wanaas kalz anezhañ, pezh a aotreas er c'heit-se, da Jafrez mab Konan, da gemer hêrezh e dad, d'e lakaat kedanavezout da Zug evit Breizh a-bezh, da sevel un arme c'halloudek dre ar vro a-bezh, ha dont a-benn da rediañ Judikael da blegañ dezhañ, ha d'e gedanavezout evel e bennaotrou ha neket Kont Anjev. Deuet e oa ar peoc'h en-dro e Breizh, ha war-un-dro hec'h unvaniezh. Tremen a rae an dra-se e 995, tri bloaz war-lerc'h eil emgann Konkwered.

Donwal Gwenvenez

Addisplegoù

Birvidik eo chomet koun an daou emgann Konkwered-se en eñvor ar bobl³. Komz a ra an Tad Léon Trivière, istorour Gwenvenez-Penfaw, a-zivout an dra-se en unan eus e levrennoù, talbennet *Souvenirs du vieux Guéméné*. Bez' e ra meneg etre traoù all eus ur c'hrennlavar kozh a rede c'hoazh dre ar c'hanton e derou an ugentvet kantved hag a lavare e mitaweg : “*S'é koom à la battây dë Konkreë, ëyou k'en twersu batti en drë*” (Bez' ez eo evel en emgann Konkwered e-lec'h unan kamm a gannas unan digamm), pa felle d'an dud komz eus disoc'h un dra bennak ha ne oa ket bet an hini a c'hortozed. Bez' e voe ivez an doare-se da zisplegañ an anv *Conquereuil*⁴ ; e-pad pell e lavare an dud - hag hiziv c'hoazh a-wechoù - e teue *Conquereuil* diouzh un distresadur eus *Konan-Karnel*, pezh a oa evel-just evit ober dave d'an niver bras a dud varvet e-barzh foziou an eil emgann.

Souezhusoc'h eo ur vojenn dastumet e parrez ar C'havr, parrez a denn hec'h anv eus “*Koadeg ar C'havr*” a c'holo an tri c'hard eus gorread ar gumun, hag emañ e kreisteiz Konkwered. Bez' ez eo “*Mojenn Dervenn an Dug*”, a-zivout an dervenn-se, kozh-kenañ, ma ne chom ket kalz tra eus he c'hef marv, hogen hervez ar vojenn a vije bet muioc'h eget mil vloaz. An dra nemetañ na glot ket etre ar vojenn hag an emgann ez eo e vez komzet enni eus erc'h, neuze emamp er goañv, paz eo c'hoarvezet an eil emgann e dibenn miz Mezheven. Hogen ar mojennoù a zo danevelloù e-lec'h e laka ar bobl barzhoniezh, arouezioù ha

³ Pa voe difraostet lanneier Konkwered e kreiz an 19-vet kantved e voe kavet un toullad houarnajoù merglet a voe kemeret evit klezeier ar marc'heion marvet er foziou.


⁴ N'eo ket sklaer orin an anv-se, *Conquereuil*, e galleg ; ar stumm koshañ a vije bet *Conquareticum* en XI^e kantved, ha *Concorotium* e 1123, pezh a roas tro da Alan-J. Raude da ginnig « *Konkwered* » diwar « *Konk* » (karter, kanton) + « *gweret* » (retranchement de terre, hengeltieg **werito*) d'ar Greizenn-enklask war an Anvioù-lec'h eus Ofis ar Brezhoneg, pa laboure evit sevel kartenn Breizh penn-da-benn e brezhoneg, met ne voe ket degemeret e ginnig. Koulskoude ne oa ket disol : ur c'harter eus ar bourk a zoug un anv brezhonek *Trebuton* a c'hellfe bezañ bet anv ar gêriadenn en he fezh gwechall, bet diverket tamm ha tamm gant an anv nevez, savet oc'h ober dave da foziou an eil emgann, *Konk-Wered*. Forzh penaos *Conquareticum* ha *Concorotium* a zo anvioù bet skrivet goude an emgannoù, hag o deus bet poan da vezañ stabilaet diouzhtu, setu perak e vije bet skrivet meur a stumm anezho : *Concuruz* e kartular Redon e 1026 ha 1148, hag e-lec'h all *Concretus* 1046, *Conquereus* 1050, *Concreux* 1287 ha 1630. *Konkreu* a zo an distagadur e mitaweg. A-hend-all ne vank ket al lec'hanvioù brezhonek er barrez : *Lanvaw*, *Koadkaden*, *Kranhoed*, *Roskoed*, *Koadvez*, *Boudig*, *Brehan*, *Koatidel*, *Mortier du Faw*, *Koadma*...

gwengelou⁵, pezh a gaver ivez er Barzhaz Breizh, e-lec'h ez eus a-wechoù disheñvelerioù etre an darvoudoù ha komzoù ar c'hanoù. Met, forzh penaos, ez eus bepred un tamm gwirionez e gwrizienn pep mojenn.

Mojenn Dervenn an Dug⁶

En amzer-se e teue ar C'hallaoued da ober brezel d'ar Vrezhoned en o bro. Galvet en devoa Dug Breizh an holl wazed, gouest da zougen an armoù, d'en em vodañ en-dro dezhañ a-benn bountañ o enebourion er-maez Breizh. Deuet e oa an holl ha bodet e oant e Koadeg ar C'havr. Degouezhet eno e lavaras dezho tud an tolead e weled soudarded en tu all d'ar goadeg hag e oa leun ar maezioù ganto.

Evel ma tostae an noz, e tivizas an Dug e kouskfe e-harz d'ur wezenn derv tev, el lec'h a dremen evit bezañ kreiz-dik ar goadeg. Unan eus kavandiz an Dug a lavaras dezhañ en devoa klevet komz eus an dervenn-se. Evit gwir e konted e c'hoarveze d'ar re a dremene an noz ouzh troad an dervenn-se da gompren lavar ul labous a gane er gwez. Hag al labous-se a ziougane an dazont.



Ne fellas ket d'an Dug krediñ pezh a lavare e gavandiz. Pa voe bet graet ur gwele mat evitañ, gant raden ha diskourrachou war-c'horre en abeg d'an erc'h a gouezhe, e c'hourvezas an Dug hag o vezañ ma oa skuizh-kenañ, en em roas da gousket kerkent.

Edo a boan o kouezhañ er c'houk ma voe un dev a vran evit dont da gludañ war an dervenn hag en em lakaas da wikal. Klevet e voe gant an Dug en e gousk hag ar vran a lavare :

- Konkreu ! Konkreu ! Konkreu !

Hag e voe evel-se e-pad an noz a-bezh.

D'ar gouloù-deiz, pa glaske an heol treuziñ al latar, ur floc'h, hag a oa bet hegaset gant koagerezh ar vran, a dennas ur bir outi, hag en un doare ken ampart ma voe tizhet al labous hag e kouezhas ouzh troad ar wezenn. Ober a reas e wad ur mell saotr ruz war an erc'h gwenn. Sevel a reas an Dug gant e

⁵ Gwengel : *mythe*

⁶ E Koadeg ar C'havr ez eus bepred un alez anvet « *Alez Dervenn an Dug* » ; anvet eo bet ivez an dervenn-se « *Dervenn an Oferenn* » rak e-pad an Dispac'h Gall e veze lavaret an oferenn e-harz dezhi gant ur beleg didou.

wazed. Hag evel ma ne oa ket dihunet mat c'hoazh, ez adlavare :

Konkreu ! Konkreu ! Konkreu !


Hag e lavare dik evel ar vran !

En ur glevout an Dug oc'h adlavarout atav an hevelep komzoù, hag en ur welout ar gwad war an erc'h, e kredas a c'hrad vat ar soudarded e oa gloazet hag e roe kalon dezho evit mont d'an emgann. Kemer a rejont o armoù hag e tifourkjont eus ar goadeg. En em stlepel a rejont war-du «Konkreu» a zo en hanternoz Koadeg ar C'havr, dre ma kredent e oa an anv-se a zistage an Dug. Degouezhet eno e kavjont ar C'hallaoued a oa a boan o paouez dihuniñ ha riellet-holl gant un nozvezh tremenet dindan an amzer.

O mad a reas ar Vrezhoned eus an degouezh ; kouezhañ a rejont warno en un doare ken trumm ha ken taer ma voent flastret-mik ganto hag abaoe n'int ket deuet en-dro.

An neb a venn,
hennezh a c'hall
An neb a c'hall a gas
ar Gall
A gas ar Gall, a harp e
Vro,
Hag eviti taer ha taero
!

Drouk-kinnig Nevenoe, Barzhaz Breizh



Amvevadouriezh ha brezel armerzhel

Ur wech anavezet disoc'h an dilennadegoù evit an Dael⁷ europat ez eus bet gwelet war hor skrammoù skinwel dremmoù glac'haret ha dremmoù o c'hoarzhin. E-touez ar re a c'hoarzh e oa dreist-holl ar re eus strollad ar re C'hlas o devoa graet ul lammgresk anat, un tammig e pep lec'h, daoust ma oa strollad ar re o devoa mouezhiet gant o zreid an hini en devoa graet al lammgresk brasañ, pezh a ziskouez ne oa ket Europa o freder kentañ pe d'an nebeutañ n'o devoa kavet netra gwall deurus er geusturenn a ginnigent dezho.

Evel-just e voe pedet diouzhtu ambilher⁸ ar re C'hlas gant tud ar chadennoù skinwel da zisplegañ perak ha penaos o devoa graet berzh, hag e-pad meur a zevezh ne voe anv nemet eus amvevadouriezh gant addisplegerion ar skinwel, zoken gant tud ha ne oant ket eus ar strollad-se. "Paz eus greun da valañ ez eo ret hen malañ", a hañvale bezañ ger-stur ar mare evit kelaouennerion ar skinwel, pe mar kavit gwelloc'h, "Paz eo tomm an houarn ez eo ret skeiñ warnañ".

N'em eus ket mouezhiet evit danvez-kannaded ar strollad-se, met se ne vir ket ouzhin a vezañ un den a vev o tougen bri d'an natur, pezh a zo un dra naturel evidon o vezañ maz on bet ganet war ar maez hag o vevañ bepred er-maez diouzh ur gêr vras. Antronoz Sul an dilennadegoù, war-dro nav eur beure, e ris va soñj mont da gerc'hat bara da di ar baraer a zo e-kreiz ar bourk, e kichen an iliz, hag evit se e tiskennis, war droad evel-just, gant ar straed a dremen dirak va zi. Ha petra a welis ? Leun e oa ar straed a girri-tan a bep seurt, hag heñvel e oa er straed all a zo a-serzh d'am straed. Tri c'hant pe pevar c'hant tankarr a oa. Biskoazh n'em boa gwelet kement a girri em straed, met gwir eo, ez an peurliesañ da gerc'hat va bara un tammig diwezhatoc'h, war-dro dek eur lakaomp. Petra a gemmfe an dra-se ? Disoñjet em eus lavarout deoc'h ez eus ur skol hag ur skolaj e-tal din em straed, hag ar c'hirri-se a oa kirri ar gerent o tegas o bugale d'ar skol, met memestra ! Hag ouzhpenn-se ne gontan ket ar c'hirri-boutin o tastum hag o tegas ar skolidi o chom pell er ploue.

⁷ Dael : *parlement*.
⁸ Ambilher : *leader*.

En ur welout an holl girri-se e ris evel-just dave d'ar pezh em boa klevet en derc'hent er skinwel a-zivout trec'h, sañset, an amvevadelourion en dilennadegoù. Pa oan bihan ez aen-me d'ar skol war droad, pevar c'hilometrad a hent da ober evit mont ha kement-all da ober evit dont en-dro. Pa voen koshoc'h e ris an hent war varc'h-houarn avat, a drugarez d'am eontr Edwarzh - Doue d'e bardono – bet marvet en ur gwallzarvoud ; heritet em boa e varc'h-houarn. Va breur Herri, c'hwec'h vloaz yaouankoc'h egedon n'en devoe ket ezhomm da ober an hent-se war droad pa voe e dro da vont d'ar skol : e gas a raen ganin war doug-pakadoù va marc'h-houarn. Ne dalvez ket ar boan lavarout deoc'h n'em boa ket ezhomm da ober sport goude-se, an dra-se a oa sport a-walc'h evidon, seul vui ma veze alies labour ouzh va gortoz ouzhpenn-se en atant va zad, evel mirout ar saout, pezh ne oa ket al labour skuizhusañ avat.

Disheñvel krenn eo an traoù hiziv ; ezhomm o deus ar vugale da ober sport, setu pezh a glever dizehan ; dre ma ne reont ket a-walc'h a embreg-korf, gant an eurvezhioù a dremenont chouket dirak skramm o urzhiatorell pe o c'hoari war o *play station* ; re dev eo lod anezho zoken war pezh a glever. E-tal din em straed ez eus ivez ur sportva, hag e welan ar vugale-se o tont da ober sport d'ar Merc'her ha d'ar Sadorn, met ne zeuont ket di war droad, degaset e vezont gant karr o c'herent. "Ne c'heller ket o lezel da zont en o-unan" a lavar ar gerent, re zañjerus e vefe, gant an holl wallzarvoudoù a c'hoarvez bemdez war an hentoù, kement a girri a zo bremañ.

Daoust ha n'eo ket se ar c'hi o kregiñ en e lost ? Kemer a reer e garr dre maz eus re a girri, sañset dañjerus, war an hentoù !!!

Ha n'eo ket aze e vez foeltret ar muiañ c'hoazh gant ar c'hirri. N'eus ket kalz labour war ar maez, serret eo bet an nebeud labouradegoù a chome c'hoazh, hep komz eus an holl dornwezhourion⁹ maz eo bet laeret o labour gant ar greanterezh¹⁰. An dud a ya da labourat er c'hêrioù bras, amañ da Naoned pe St Nazer pa n'eo ket Roazhon, oc'h ober 70, 80, 100 kilometr pe muioc'h c'hoazh gant o c'harr bemdez. Gwastet e vez gremm ivez

⁹ Dornwezhour : *artizan*.
¹⁰ Greanterezh : *industrie*.

pa fell deomp debriñ saladenn e kreiz ar goañv, pe sivi da zeiz Nedeleg ; kenderc’hañ erc’h kevanaozel evit gellout skiañ pa ne ra ket erc’h dre natur, pe mont d’ober gralig en inizi Maldives pe inizi Seychelles pa vez skorn du-mañ ; lakaat aozañ hor gwiskamantoù en Azia hag o degas amañ dre garr-nij, pa vez serret al labouradegoù o aoze a-ziagent amañ ha paeet ar c’hoskor difredet gant skorennoù dic’hwel¹¹ ; prenañ boued ragaozet divlaz pe re zruz ha klemm da c’houde e vez klañv an dud gantañ.

Met tud zo a lavaro e vez roet labour evel-se da dud a chomfe dilabour en doare all. Ya, met ar reizhpoell a genteilhfe kentoc’h ober ni hon-unan pezh a c’heller ober ha prenañ hepken pezh na c’heller ket ober ; hag heñvel evit ar broioù : kenderc’hañ pezh a c’heller kenderc’hañ er vro hag enporzhiañ hepken ar pezh na c’heller ket kenderc’hañ. Hogen n’eo ket evel-se e reer abaoe pell, siwazh !

Peogwir e vez anv eus dilennadegoù europat amañ, e c’heller lavarout n’eo ket bet zoken keal Europa unanet, ur mennozh ken mat ha se e keñver amvevadouriezh, peogwir en deus atodet ur vazh-skeul amaezhiadurel ouzhpenn gant an holl zilec’hiadurioù tud a vez empleget gant se, ha ne gomzan ket eus ar goproù uhel paeet d’an holl gannaded, sekretourion, kargidi hag uhelgargidi europat. Ar c’heal lakaet en derou a oa bet, sañset ha mar ne fazian ket, evit ma ne vefe mui brezelioù etre ar broioù europat, met aes e oa paouez gant ar brezelioù-se, ne oa nemet divizout ne vo mui anezho, met se n’en deus ket miret ouzhpenn da vont da ober brezel e lec’h all, hag en Europa zoken – ouzh Serbia da skouer, evit staliañ en he froviñs Kosovo, a oa kavell ar vroad, ur stad vuslimat.

Hiziv ez eus tu d’en em c’houlenn hag-eñv n’eo ket bet savet Europa unanet evit ren ur brezel all, ar brezel armerzhel. Gant broioù bihan hag enno embregerezhioù bihan pe etre ez eus tu da aozañ ar gedvuhez o tougen bri d’an amvevad¹², rak an dislankoù¹³ n’int ket re hir peurvuiañ mar deo dasparzh mat ar boblañs hag ar greanterezh war tiriegezh ar vro, neuze an dezougen ne zeu ket da vezañ ar sklofer¹⁴ gremm evel maz eo deuet da vezañ d’an deiz a hiziv.

Gant Europa unanet eo bet kemmet an doare da welout an traoù. Ret e oa d’an embregerezhioù

¹¹ Dic’hwel : *chomage*.

¹² Amvevad : *environnement écologique*.

¹³ Dislank : *distance*.

¹⁴ Sklofer : *glouton, morfale*.

kaout ar vent europat, a veze lavaret deomp, evit gellout kevezañ gant an embregerezhioù europat all a heulie an hevelep ger-stur, da lavarout eo e oa ret dezho kendeuziñ etrezo evit bezañ brasoc’h. Se eo hon eus klevet a-walc’h digant ar bolitikerion a alie, goude-se, d’ar vicherourion mont da glask labour e-lec’h ma oa dioutañ¹⁵, sañset, hag a wechoù pell diouzh o bro - dalc’hit soñj eus komzoù Jacques Chirac oc’h ober al lu ouzh ar re yaouank na felle ket dezho kuitaat brozhioù o mammoù -, da zic’haouiñ an dud e veze azavet¹⁶ e vefe evel-se muioc’h a genderc’hadoù beveziñ marc’had-mat evit pep hini¹⁷ - ret mat eo azaviñ bepred muioc’h evit bezañ dilennet a-nevez.

P’o deus bet an embregerezhioù o ment europat ne oa ket echu c’hoazh an tolpadurioù ha kendeuzadurioù : preizhoù nevez e oant deuet da vezañ evit pesked tevoc’h egeto c’hoazh, rak ar c’hevezerezh kantreol etre embregerezhioù bihan, bras hag etre en devoa lezet plas d’ar gevezadeg gouez ha ferv etre kevredadoù liesvroadel bras ar voull-douar ha na dermont ket d’en em lonkañ etrezo evel ar morvleizi maz int. Goude bezañ lakaet o c’hrabanou war an nevid, n’eus mui frankiz armerzhel ebet er bed embregerezhel ma vez ennañ brezel an holl a-enep d’an holl evit gounid ar marc’had – un testeni anat a vez roet deomp gant an dasparzh bras¹⁸. Ha gwazh a se evit an amvevad, ha gwazh ha se evit ar c’hoskor ma vez distrujet e labour, ha ma vez kinniget dezhañ divroañ. Goude bezañ bet gwallgaset gant bedelidigezh an armerzh e soñj marteze, morvleizi ar c’hellid¹⁹, e vo an dud azv evit asantiñ d’ar gwir vedelouriezh, ar gouarnamant bedel.

Koulskoude ez eus ur reolenn entropiek tonkadek ma vo ret deomp plegañ dezhi : ne c’hellomp ket korvoiñ muioc’h a zanvezioù naturel eget n’ez eus en hor c’herz. Setu perak e vez prederiet kalz tud gant dibenn ar gremmoù karregek²⁰, ha ma vez kinniget evel diskoulm kenderc’hañ trelosk diwar ar plantennoù.

¹⁵ Gremm foranet evit dilec’hiañ ar greantioù ha gremm foranet evit d’ar vicherourion mont da labourat pell diouzh o ziez.

¹⁶ Azaviñ : *promettre*.

¹⁷ Gremm foranet a-nevez rak er c’hevezerezh ferv a anavezet bremañ e vez kaset kenderc’hadoù oberiet e Breizh, lakaomp, betek penn all Europa ha kenderc’hadoù heñvel oberiet du-hont a vez degaset e Breizh

¹⁸ An dasparzh bras : *la grande distribution*.

¹⁹ Kellid : *finance*

²⁰ Gremmoù karregek : *énergies fossiles*.

Hogen se n'eo ket beziadus hep kemmñ don hon doareoù bevañ, rak ne vo ket a-walc'h a zouar aradus dre ar bed evit kenderc'hañ boued evit an dud, ha gounit plantennoù evit kenderc'hañ kement a drelosk. Daoust ha kevergollek²¹ e vo evit se ? Nann ! Rak pep hini ac'hanomp a zo gremm en e gorf, daou zorn, daou droad gantañ evit kerzhout ha labourat ; hag an Aotrou Doue en deus roet deomp al loened doñv, kezeg, azened, oc'hen, a vo laouen da servijout a-nevez evidomp.

Bevañ er c'hêrioù bras a zo deuet da vezañ

²¹ Kevergollek : *catastrophique*.

rivinus, se n'eo ket souezhus peogwir ez eo ret enporzhiañ pep tra evit ar boued, pa vez kalz aesoc'h bevañ war ar maez, da skouer gant ul liorzhiq evit gounit e legumaj. Ret e vo paouez gant an tolpadurioù a bep seurt, kêrioù, broioù, embregerezhioù, ha dizober pezh a oa bet graet. Breizh a veze kensellet evel ur vro vihan, dister zoken gant tud zo, a zeuio da vezañ ur vro vras, d'an nebeutañ bras a-walc'h evel kalz broioù all a vent-den, evit un doare nevez da vevañ.

Yann MIKAEL

Kentel vihan a Feizoniezh

Ur mignon din, kristen deol ha studiour, en doa prientet un droidigezh bortugaleg pizh-pizh eus *Addisplegoù* Rikardo a Sant-Viktor war an *Diskuliadur*. Rikardo hag e genlabourer Hugo, o-daou feizoniourion ha prederourion eus abati Sant-Viktor e Bro-C'hall, Rikardo ar Skosad hag Hugo ar Sakson, a zo e-touez ar re a vefe goapaerezh ober "skrivagnerion veur" anezho. N'eus barregezh personel ebet a c'hall displegañ ar sklerijenn a zeu eus an Neñv. An daou o deus skrivet nebeut. Padal, an nebeud-se a zo unan eus teñzorioù-meur an Iliz hag an Denezh. Kaset e oa bet an droidigezh d'un ti-embann katolik e Brazil, ha kaset c'hoazh ac'hann d'ur feizoniour da vezañ skridvarnet. Setu aze e respont :

“An droidigezh-mañ a zo talvoudus hag a-bouez evel teul da vezañ arveret gant imboure'herion ha skolveuriz... Evel levr-keleñn avat ne dalvez mui kalz tra, siwazh, evit an dud didro hag eeun a vremañ... Al levr a zo enket e tro-spered an XIIvet kantved...”

Ha kenderc'hel a ra e-giz-se, hag aliañ a ra ivez, e-lec'h levr treamzerel Rikardo a Sant-Viktor, an oberenn *Penaos Lenn An Apokalups : Stourm ha Flatrañ*, skrivet gant ur José Bortolini bennak. N'em eus ket lennet al levr-se, met diwar lenn an titl e weler n'eus ket liv ar c'hozh warnañ : ar ger "flatrañ" e-unan a zo a-walc'h evit tizhout kreiz donañ kalon paotred ar stlenn, peogwir ez eo dever uhelañ mab-den hervez ar skandalerion a-vicher.

Kelennadurezh e-leizh a gaver er respont-se, ha reiñ a ran amañ ar pezh am eus gallet tizhout gant ma zammig poell :

1) Ar feizoniezh katolik, e-lec'h kreskiñ dre verniañ hag unvaniñ, dre ouzhpennañ kavadennoù hiziv da re dec'h, evel ma ra an holl feizoniezhoù all (muslimat, yuzev, vedantat pe boudaat), he deus *kemmet* hep muiken, he deus lakaet ar feizoniezh arnevez *e-lec'h* an hini kozh, evel m'emañ kont gant ar gizioù gwiskamantel pe er c'hatalogoù sonerezh *rock*.

2) Ar gatologiezh a zo orinel war ur poent all ivez : tra ma vez prizet ar muiañ gant ar c'hravezioù all an devezadennoù tostañ da vammennoù orin o diskuliadurioù, ar gatoliked avat, awenet gant an araokaat, a gompren gwelloc'h-gwell kelennadurezh Jezuz Krist a-feur ma pellaont dioutañ en amzer ha ma ankounac'haont ar pezh a voe lavaret gant ar sent en XIIvet kantved, en XIvet, en Xvet pe er c'hantvedoù a-raok c'hoazh.

3) A-drugarez d'an araokaat kalvezel marteze, ez eo eeunoc'h annezidi kêrioù bras an deiz-hiziv, ha didrooc'h o spered eget peizanted, kannerezed, bugulion ha gwiaderezed an XIIvet kantved, ar re-se holl, tud lennek-kenañ, strizh o spered, hag a lenne neuze Rikardo a Sant Viktor.

4) Gweladennoù ar sent, ar ouizieion-meur hag an diouganerion ne eztaolont ket gouloù an diamzer, harzoù bredel ar marevezh istorel ma vevent enni, ne lavaran ket. Ar gweladennoù-se, neuze, a zo ken deziadus ha berrbad ha disoc'hoù al loto pe mennozhioù ar feizoniourion skañvboell. Abalamour d'ar c'holl entropiek diehan-se, komzoù an Ebestel, bet distaget daouzek kantved a-raok re Rikardo a Sant Viktor, a deuz muioc'h c'hoazh dirak kemprededezh veurdezus an Ao. Bortolini.

Souezhus eo, neketa, e c'hall studi katolik ar Bibl bezañ ken dizifenn dirak labour-dismantrañ an amzer, ha war un dro araokaat diehan, tizhout liveoù uheloc'h-uhel, betek hini an Ao. Bortolini hiziv ? A Emdroadur Santel ! a c'hourbannfe an Tad Teilhard. Paotrig kontadenn Perrault a ranke strewiñ mein, kuit da goll e hent, warlerc'hiet ma oa. Ar gatoliked avat a zo bet roet dezho an donezon da c'houzout gwelloc'h-gwell e pelec'h en em gavont seul vuioc'h ma tisoñjont an hent a heuliont. Arabat deoc'h goulenñ ouzhin penaos e c'hall bezañ an dra-se. Ur mister nevez eo, lakaet gant an deologiezh arnevez e-lec'h ar re a oa e marevezh varbar Rikardo a Sant Viktor. "Mister an istorouriezh" a rankfed ober anezhañ, sakramant-a-ratozh dezhañ ha toud, ha gouel ar mister-se a rankfe bezañ lakaet e deiziataer al lidoù, da zeiz ganedigezh Sant Antonio Gramsci, anezhañ krouer-meur an holl draoù a-seurt-se.

N'eo ket ur mister, atav, penaos un Iliz, p'en em stlej kement dirak ar bed, betek ober fae war gelennadurezh he mistri peogwir n'int ket kenamzer a-walc'h gant stumm diwezhañ ar *Pokemons*, a zo warni ar riskl da echuiñ evel ar c'hast kozh e *Levr Ezekiel* : houmañ, peogwir ne

gav mui klianted da baeañ anezhi, a rank a-benn ar fin paeañ anezho evit bezañ perc'hennet ganto.

Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant **Ewan Delanoy**, embannet evit ar wech kentañ e *Jornal da Tarde*, dindan an titl *Lição de teologia*, niverenn ar 2 a viz meurzh 2000.

Notenn gant ar gelaouenn :

“Pa ra Olavo de Carvalho e dibenn ar pennad-mañ, diwar-benn an Iliz, an heñveladenn eus gast kozh ur pennad eus ar profed Yezekael, marteze Yz 23, 1-10, n'eo ket eus an Iliz eo e rankfe ober anv, hervez ar pezh a skriv a-raok, rak, diouzh a ouzomp, n'anavez an Iliz Santel katolik nemet bongoalioù da grediñ. N'he deus, koulz lavaret, feizoniezh kefridiel ebet eta. Labour ar feizoniourion eo reiñ un intentidigezh bennak eus pennadoù ar feiz evit an amzer ma vevont ennañ. Nann, an Iliz n'eo ket na ne c'hell ket bezañ evel gast kozh levr Yezekiel, hogen lod eus he servijerion, a-hed eus ar c'hantvedoù, a zo bet hardizh a-walc'h, ha betek re, da vartezeañ damkaniezhoù a seblant dimp, hiziv an deiz, a-wechoù goude kantvedoù, pe nebeut war-lerc'h zoken, gwall arvarus, ha disrogus zoken”.

Sant Kolomban, ur C'helt

E Bangor, e Hanter-Noz Iwerzhon a-vremañ, eo bet ganet Kolomban er bloavezh 542. Aet da vanac'h, eo bet dibabet da abad war ur manati a 6000 lean. Nes Bangor, emañ Downpatrick, sellet evel penn hent avieladur St Padrig, e 432. Asur eo eta en deus hor manac'h en em vataet eus Padrig. An hini a oa bet skrapet gant morlaeron, e Breizh-Veur, d'an oad a 16 vloaz ha kaset ganto da Eire, evit bezañ mesaer deñved. Dont a ra a-benn da dec'hout ha da adkavout e dud. Met skeiñ a ra trema Galia, e-lec'h maz eo stummet en abati Lerina (*Lerins*). Beleget hag eskobet gant Sant Jermen pe gant eskobed vreizhat, ez eo bet kaset da Iwerzhon. Anavezet eo e brezegenn diwar teir flipezenn oc'h ober un delienn melchon hepken – *ar shamrok* -, oc'h aroueziañ an Drielezh-Doue. E Padrig en deus Kolomban puñsaet uvelded, blaz ar bedenn, ar yun hag al lusk misioner. E Galia, d'ar c'houlz-se, n'eus mui a gravez. Neuze, ec'h embann ar venec'h an Aviel hag e fromont gant o ferzhioù-mat. Dreist-holl gant o izelded. Euzhiñ a raent ouzh an diegi hag an dizunvaniezh. En em zifaziañ a raent kenetrezo. Pep tra a oa boutin en

o metou.

Brud Kolomban a dizh lez Sigebert roue Aostria ha Burgondia. Hemañ a c'houlenn digant ar manac'h chom en e dra, e-lec'h ma karje. Eilgeriañ a ra al lean ne c'hoanta ket pinvidikaat. “Mar fell dit, eme ar roue, an dienez ha kroaz ar C'hrist, dibab ar gouelec'h a blij dit ; chom avat em rielezh”. An abad a gemer un dachennad ec'hon, digenvez ha roc'hek, e-lec'h ma vevont diwar nebeut. Aze er Vosjez, e sav e vanati : Luksovium (*Luxeuil*) e 590.

E 599, e skriv d'ar pab Gregor Meur a-zivout an doare da lidañ Pask, rak savet en deus reolennoù diwar-benn ar penn gouel-se. Kement a dud a zeu war e dro ma rank en em staliañ er Feunteunioù. Dibab a ra renerion d'ar c'hedunad-se, o tremen pennadoù-amzer e pep hini eus e ziazezoù. Leun gant ar Spered Glan, e fard evito ur reolenn fetis an tamm anezhi. An Aotrounez avat a zo droug enno en e geñver. Neuze ez eo mall gantañ mont d'o gwelout evit distanañ o enebiezh. Erruout a ra Den-Doue e palez ar roue da guzh-heol. Met

nac'hañ ra mont-tre. Aozañ a ra neuze an Unpenn ur banvez. Kolomban a nac'h tostaat. “N'eo ket dereat, emezañ, e vije saotret genou ar wazion gant boued an hini a vir ouzh al leaned da zont en e diez hag e tiez ar re all”. D'ar c'homzou-se, ez a al listri a-dammoù hag e fuilh d'an douar gwin ha likorioù. Spontet, ar vevelion a gemenn d'ar roue pezh a zo c'hoarvezet. Hemañ strafuilhet, a ya d'e dro da gavout an den santel evit goulenn pardon ha kavout youl da wellaat. Saderaet gant ar promesaou-se, e tistroas ar sant d'e abati.

E 603, e skriv d'ar pab Bonifas evit difenn adarre e stumm da lidañ Gouel-Fask. Eus 610 da 612, oc'h en em glevout fall gant ar roue Tierri hag e vammgozh Brunehilde ez eo ret dezhañ harluiñ. Pignet war ur vag e Naoned, ez eo pedet da zistreiñ da Iwerzhon. Met paket er gwall-amzer, ar venec'h a zo distaolet hag ez eo ret dezho repuiñ dindan Kloter II a ren e Loezren. Goude-se ez adpignjont gant ar stêr Roen, o tilestrañ e Zurig ; un dousennad a zo anezho. Chom a rejont, ur pennadig amzer e-kichen ar gêr-se, e Treggen. Sant Gall a oa kement a vall ennañ da ziskar an idolennoù taolet gantañ el lenn ma kasas kuit gwazourion ar baganed, kounnar ruz enno. Ha setu int-i etrezek Bregenz e-lec'h ma tiazazont ul Luksovium all. Sant Gall a gouezh klañv hag a ya da ober penitiour, stok ouzh lenn Konstañz.

Ar re all, e 612, a gred treuziñ an Alpoù. O kuitaat Galia ha Germania, e tizhjont Italia, degemeret-kaer eno gant roue al Lombardiz. E Milano, en em stal al lean meur, e-lec'h ma stourm ouzh an ariadouriezh. Met unan bennak a gemennas avat d'ar roue e oa er menezioù ur benniliz gouestlet da Sant Pêr, en ul lec'h anvet Bobbio. Mont a ra ar sant hag e kav du-se un neved hanter zismantret. Adnevezet kaer eo gantañ, hag en diwezh, eo savet eno an abati. Eno ivez, e 615, d'an 21 pe d'an 23 a viz Du e varv an “den santel” (vir sanctus) ha d'al liesañ, “gour Doue” (vir Dei).

Bez' ez eus anezhañ un nouez o tont war-eeun eus ar Bibl, a-dreuz ar Bibl, a-dreuz un hir a zazroadur kristen. Ar senthanezouriezh²² a ro da amwelout e oa anezhañ un den garv ha taer, kriz en e gomzoù

betek ober ki ouzh ar roue Tierri ha mibion gisti²³ ouzh e vugale.

Zoken etre sent ez eus koumoulennoù ! Gall a nac'h heuliañ Kolomban da Italia, oc'h ober an neuz da vezañ skuizh ha klañv. Kolomban, oc'h c'houzout ne oa ket se gwir bater a gemennas dezhañ chom hep oferenniñ. Hogen d'an 23 a viz Du 615, p'edo o vont da Arbonn da santelaat ar Sul, e c'hourc'hemenn d'an diagon Magnioliad aozañ pep tra evit ar C'hevradiezh²⁴. Hogen an aoter a oa berzet outañ. Ouzhpenn-se, dre hunvre, ez eo degemennet dezhañ e oa tremenet e Vestr Kolomban. Echuet an Oferenn, e kerzh an diagon da kaout keloù eus dibenn-buhez an diazeour meur. Hag e tistro kerkent gant ul lizher a bardon hag ar vazh-abad, o verkañ an ademghev. E dibenn 615, ec'h erru “battuta” Kolomban e peniti e genvreur, e-lec'h ma oa kehelet.


Sant Kolomban a zo dellezek da vezañ a-renk gant Kirilloz ha Metodios, Berc'hed a Sveden, Tereza Benedik ar Groaz (Edith Stein), paeroned Europa.

Roudoù Sant Kolomban er broioù keltiek hag e-lec'h all

Evel-just ez eo er broioù ma tremenas an darn vrasañ eus e vuhez oc'h avielañ e kaver ar muiañ a roudoù eus St Kolomban : Luxeuil e Burgondia ; Wangen, Wallenkapell, Sant Gall ha Rorschach e Bro-Swis ; e Liechtenstein e-lec'h ma tremenas e 612, ul lenn hag ur menez 3000 m uhelder a zoug e anv ; en Italia abati Bobbio, hag ilizoù kensakret dezhañ e Campo hag e San Colombano al Lambro.

E kêr vihan Bangor en Iwerzhon, n'eus mui roud ebet eus an abati a 6000 manac'h. Paneve, marteze, un nebeudig mein e moger Sant Malakiaz o kaeliañ ar vered. E Wicklow, emañ ti-mamm leanezed St Kolomban, bet krouet e 1917

gant daou veleg ; e 1922, eo savet ganto ur Vreuriezh dindan paeroniezh hor sant, un delwenn anezhañ e marmor gwenn sichennet dirak an ti. Eus ar seurezed ez eus 200 anezho, ar veleion 600,



²² Senthanezouriezh : *hagiographie*.

²³ N'eo ket souezhus, ouzhpenn ar rouanez e fried, en devoa Theodoric meur a serc'h.

²⁴ Kevradiezh : *eucharistie*.

strewet dre ar bed a-bezh. Gant ar ger-stur : Let us be Christ, not our own” (Tra ar C'hrist ez omp, nann tra dimp-ni). Ar pezh a oa ger-ardamez an den-Doue. E Kernew-Veur ez eus un tammig roud anezhañ, e diw gêrig : Sant Kolomb Menor ha Sant Kolomb Major ; e levr-oueg Truro ar gêr-benn, mann ebet diwar e benn.

A-benn ar fin ez eo e Breizh ma vez ar muiañ a eñvorennoù eus Sant Kolomban peogwir e vez kensellet evel unan eus sent Breizh. En abeg marteze ma lestras e Naoned evit distreiñ da Iwerzhon – kaset en harlu gant Theodoric (roue Tierr Burgondia) - ez eo bet anvet “Sant Kolomban”, ur barrez e kreisteiz Naoned, e-barzh kanton St Filberzh al Lennveur. Met hervez ma kont Albert Le Grand en e vuhez St Kolomban, ne zistroas ket da Iwerzhon ; pa voe ar vag er meurvor, dre ur seurt burzhud ne voe mui tu da vont pelloc'h gant ar vag, nemet distreiñ da Vreizh, hag ez eo evel-se e weladennas hor bro, a-raok mont da welout Klotaer II, eil mab Chilperic, a rene e Loezren. Met un abeg all a zo da geheladur St Kolomban e Breizh. Unan eus hon Duged, o tont en-dro diouzh Roma, pell war-lerc'h marv ar sant, a dremenas dre vBobbio. Kavout a reas ar c'haer a vanati, met ne oa lean ebet ken e-barzh. Neuze e kasas gantañ relegoù Sant Kolomban a voe lakaet e manati Lokmenec'h en Eskopti Gwened. Diouzh an darvoud-se dreist-holl e tle dont keheladur St Kolomban e Breizh. E-kichen Sant Malo emañ Sant-Koulomb. En iliz-parrez, eo kizellet ouzh an

aoter degouezh ar sant ; ouzhpenn-se, un delwenn hag ur werenn-livet a zo gouestlet dezhañ. E Bro-Leon ez eus parrez Plougoulm hag enni chapel Itron-Varia Pradkoulm ; parrezioù Kernevel (29), Brelidi, Treweneg (22), Menezieg-Morvan (35) a zo bet lakaet dindan e baeroniezh ; un iliz, rivinet hiziv, a oa dediet dezhañ e Kemperle ; chapelioù bet savet en e enor e Karnag, Sarzhav, Kiberen, Kemper, Plounevez-Kintin, hag evel-just hini Lokmenec'h gant ur feunteun St Kolomban en e gichen ; bez' ez eus ivez ul laour gozh, anvet “bez St Kolomban” e chapel Itron-Varia ar Sklerijenn e Trebrivan (22) ; ha ne gomzan ket eus an delwennoù anezhañ e meur a lec'h...

Pedenn Sant Kolomban

Aotrou Doue, teurvez dispenn ha diframmañ kement a had ennon eus an enebour. Ha va direizhded ur wech diwriziennet, deus da imboudañ war va muzelloù ha war va c'halon soñjoù hag oberoù mat. Gra din da servijiñ, Te nemetken, gant va obererezhioù ha va mennadoù. Ra vezin da zivizoù ha ra vezin war glask ac'hanout-Te. Daskor din roadoù an eñvor, ar garitez, ar c'hlanded, ar feiz, kement a ouezez en deus ezhomm va ene. Aotrou, seven ennon ar mad ha kas da benn ar pezh a ouezez ret evidon. Te hag a ren a gantvedoù da gantvedoù. Amen !

Ar Bigouter

Hervez al levr “Hent Sant Kolomban” 2008

Ur c'hraf yezhadur war zigarez fentigellañ

Daou zen ouzh taol, unan a vro Leon, egile a vro Wened, e ti hemañ. Echu ar pred ganto, pe dost, e lavar ar Gwenedour d'al Leonad en ur ziskouez ar voutailhad gwin chomet tost divoulc'h. “Kemer anezhi !”. Hag al Leonad da sevel diouzh taol ha da gimiadiñ en ur gas ar voutailhad gantañ.

Souezhet e voe ar Gwenedour gant emzalc'h an den hogen Gwenediz-o-c'halon-vrokus ne vroc'hont ket gant ken nebeut a dra. Soñjet en deus hepken e oa gwir a-walc'h ar vrud a red diwar-benn Leoniz : Tud dibalamour !

Diwezhatoc'h en devoe tro da gejañ er foar gant ur marc'hadour kezeg a Landivizio. Goude bezañ bet lezet an danvez-prenner da sellout pizh ouzh unan eus e loened, ul "Loan"-kezeg " pezhioù memproù gantañ ", postek, ur souezh ! Ober a reas marc'had gantañ : en ostaleri, evel ma oa ar c'hiz. Da heul, e deod deuet da vezañ

distagelletoc'h diwar ar banneoù gwin a veze diskennet ingal dezhañ gant paotr Landivizio a oa o paouez lakaat a-nevez war e gont ur voutailhad all a win, e kontas dezhañ doare digas e genvroad a vro Leon.

Ar marc'hadour-kezeg, reder foarioù dre e vicher, a anaveze mat ar brezhonegoù, dre forzh marc'hata e kement korn a zo e bro ar brezhoneg. Hag e lavaras dezhañ eta e talvez e “Kemer anezhi !” evit ul Leonad kement ha “Kemer ar voutailhad !” ha n'eo ket “Kemer ur banne anezhi !” paz eo se e brezhoneg Gwened... “Ma ! a respontas egile, un dra 'm bo desket hiziv ganit ! Evit da boan e paein ar banneoù”. “Paeañ a ri anezho ?” “Ya, o faeañ a rin holl ... ha n'eo ket lod anezho hepken”, emezañ en ur c'hoarzhin. “Get bolante mat e teuer a-benn a bep tra”...

En destenn-mañ eo koshoc'h, resisoc'h, ha skañvoc'h enta doare bro-Wened, e-lec'h ma vez anavezet dre holl hag implijet siwazh nebeutoc'h bremañ diwar levezon ar c'hKLT moarvat. Berrha-berr : reishoc'h ha mat-tre evit ar brezhoneg lennek unvan. (diwar YBB 429).

T. Gwilhmod

Notenn : Reizh eo “Kemer anezhañ” (ster Gwened) e-keñver yezhadur, met e-keñver reiz e

*c'hell bezañ un tammig forc'hellek, ha me, paotr eus gorre ar vro, on bet lakaet diaes meur a wech evit kevyezhañ ar bomm-lavar gallek “prends en”. **Mard** eo reizh e-keñver yezhadur lavarout “kemer anezhañ”, neuze penaos ober an diforc'h gant “kemer anezhañ” evit lavarout “prends-le”. **Setu perak e kavan gwelloc'h implij :** “kemer dioutañ” evit “prends en” ha mirout “kemer anezhañ evit “prends-le”. **Yann Mikael.***

Ul lennerez feal da Imbourc'h aet da Anaon

Aet eo da Anaon, d'an 16 a viz Mezheven 2009 hol lennerez feal, an Itron Vetig An Dret-Kervella, intañvez F. Kervella, aozer “Yezhadur bras ar Brezhoneg”, ha mamm Riwanon, Annaig ha Divi Kervella, o zri difennerion ar brezhoneg. Lidet eo bet hec'h obidoù d'an 18, en Iliz Brelevenez. Distaget eo bet an homelienn gant Yann Talbot.

Baradoz dudius

Va breudeur ha va c'hoarezed kristen, Mignoned vat,

Bez hon eus ur c'hantik kaer-meurbet a ganomp aliezik evit an obidoù, ha kanet e vo hiziv e-pad lid an absolvenn : “Baradoz dudius, bro ar Sent eo va bro ! A ! Pegen evurus e vin-me bepred”

Rak krouet omp bet gant Doue evit ar Baradoz, ar vuhez peurbadel. N'omp nemet pirc'hirined war an douar-mañ. Tremen a reomp un tamm amzer, berr pe hir, hirik evit hor mignonez Vetig pa oa c'hwec'h vloaz ha pevar-ugent. Met se n'eo nemet un nebeut bloavezhioù beuzet e-mesk diventelezh ar c'hantvedoù, kantvedoù a-raok dimp ha kantvedoù war hol lerc'h.

Santout a reomp e talv hor buhez muioc'h eget an nebeut bloavezhioù a dremenomp amañ. Ne c'hell ket an traoù echuiñ evidomp evel-se gant an netra, gant distruj hor c'horf. N'omp na mein, na plantennoù, na loened diemskiant, dispered, boudoù digomz ha diene. Krouet omp bet diwar batrom Doue ha heñvel outañ dre ma 'z eus ennomp un elfenn a zivarvelezh.

Fellout a ra dimp bevañ da virviken. Ar marv n'eo ket an termen a zere ouzhimp evit gwir. C'hoant hor bez da vevañ evit atav. Met setu ar marv o tont da derriñ hon holl raktresoù.

Neuze e krogomp d'ober goulennoù ouzhimp hon-unan : da betra e servij bevañ ? ; da betra e servij ar vuhez, hag hor buhez-ni ? ; petra e teuomp da vezañ war-lerc'h hor marv ? ; daoust hag-eñ ez eus un esperañs evidomp en tu all eus ar vuhez-man ?

Ar c'hantik a lavar c'hoazh : “Pegen evurus e vin-

me bepred eno.” Ya, gwir eo, c'hoantaat a reomp holl kaout an evurusted, kement-se eo a vezomp o klask dalc'hmat : bezañ evurus, bezañ er peoc'h, er vignoniezh, kaout yec'hed, kaout ur familh unvan, evel hini Vetig An Dret-Kervella, krouiñ traoù nevez ha kaer, evel pezh he deus skrivet hor mignonez en he fennadoù.

Bez' hon devez mareadoù bihan a eurvad. Met kement-se ne bad ket. Talvoudus eo gouzout tennañ hor mad eus ar mareadoù-se, ha gouzout ivez meuliñ ha trugarekaat an Aotrou Doue evit se mard omp tud a Feiz. Met n'eus forzh penaos ne badont ket. Evel ma lavar ur c'hantik all : “Tremen 'ra pep tra, nerzh, madoù, yec'hed, yaouankiz ha kened.”

Ya, tremen a ra pep tra. Pep hini a wel kement-se en e vuhez : an nerzh, ar madoù, an enorioù, ar vrud, ar yec'hed, ar binvidigezh, ar gened. An holl draoù-se a ya da get evidomp. Neuze, pelec'h, pegoulz, penaos e vo an eurvad didermen, peurbadel ? Ha tu a zo d'he c'havout en ul lec'h bennak ?

Pe neuze ne vefe hor buhez amañ nemet ur c'hwitadenn, ur c'hoari mesk-divesk diboell ha diskiant ? Ar Feiz kristen a ziskler dimp n'eo ket dibosupl tizhout an eurvad-se, diharz, didermen. Met n'emañ ket da vezañ kavet amañ war an douar. Emañ e Palez an Aotrou Doue, eno n'eus mui na daeroù na klemmoù na poanioù. Emañ an eurvad-se e Rouantelezh ar Sent a zo endeo e Gloar an Aotrou Doue, gant Sant Tudwal kentañ eskob Landreger, gant Santez Anna patronez Breizh, Sant Erwan eil batron hor bro, hag holl Sent hor Breizh, hag ar Sent a bep lec'h hag a bep amzer. “Bro ar Sent eo va bro” a lavar c'hoazh ar c'hantik. Honnezh eo va gwir vro, bro ar Sent, Rouantelezh an Aotrou Doue. Ha n'emañ ket hepken evit war-lerc'h ar marv ; emañ dija, un tamm d'an nebeutañ, en hon touez, evel had o klask diwanañ, evel greun o klask en em zispakañ. Hor gloar beurbadel ? Kroget eo dija amañ. Ne vez ket

gwelet kalz. Evel ur c'hreunennig eo, bihan-tout ha dister da welout. Met gallout a ra kreskiñ betek reiñ dimp ur wezenn vras ha frouezh kaer. Petra eo ar c'hreunenn-se, tost diwelus ? Hini ar Feiz, an esperañs hag ar Garantez an hini eo. Ha pa vez bet bevet er fiziañs en Aotrou Doue hag er garantez evit hor breudeur, evel m'he deus klasket ober Vetig An Dret-Kervella a-hed he buhez, pa vez bet stourmet evit palioù reizh, pa vez bet esperet ar pezh a zo bet kemennet dimp gant Jezuz Krist, pa vez bet klasket lakaat an Aviel e pleustr, ha dreist-holl ar gourc'hemenn pennañ : “Karout a ri an Aotrou da Zoue ha karout a ri da nesañ evel doud da-unan”, neuze hon eus hadet hon eurvad peurbadel. Eus kement-mañ ez omp sur mard omp tud a Feiz : Doue n'en deus ket graet ar marv. N'eo nemet ur gwallzarvoud war hent istor an denelezh. Setu perak e tle bezañ trec'het un deiz. Jezuz a lavar dimp : “Bolontez an Tad eo e tasorc'hin anezho d'an deiz diwezhañ. Bolontez an Tad en deus va degaset eo ne gollin hini ebet eus

ar re en deus bet roet din, met e tasorc'hin anezho-holl en deiz diwezhañ”. Poanius-kenañ eo ar marv, evit an hini a guita ar bed koulz hag evit an dud kar a chom. Ur plas a chomo goullou, gouzañvet e vo diwar an ezvezañs-se. An Aotrou Doue ne denn ket kuit ar boan-se. Ret eo da bep tiegezh e kañv treuziñ ar maread kalet-se. Met sikour a ro an Aotrou Doue dimp evit ober an dreuzadenn-se ha reiñ a ra ster d'ar pezh a vevomp hag a c'houzañvomp.

Gantañ ez omp sur e chom hor re varv, hon Anaon, bev c'hoazh en hon touez en ur stumm disheñvel, hag o adkavimp un deiz er Palez peurbadel. Lavarout a reomp dezho kenavo ! ken a-benn ur wech-all ! d'ar c'hentañ tro !

Ar c'hantik a lavar c'hoazh : “O ! peoc'h, O ! joasted, va Jezuz ha va Doue. Na pebezhus eürusted e-pad ar beurbadelezh.”

Doue da bardono d'an Anaon. Amen.

Yann Talbot

Klemmvan ur Person

Doaniusat tra un oferenn
Gant ar beleg e-unan-penn,
O lidañ ar mister santel,
Ha dirazañ nemet avel.

Ar c'hleier a c'heller tredanañ,
Evit o lakat da seniñ,
Mar chom an dud outo bouzar,
Ne vo ket klevet al Lavar :

Komz an Aotrou 'vo embannet,
Hag ar Pred santel 'vo lidet,
Met pa n'eus den da gemer perzh,
Ha mat eo ober an Aberzh ?

Deuit, va breudeur, me ho ped,
Gant aked, tizh hag unvanded,
Da ganañ d'ho Tad meuleudi
Ha da anzavout e veli.

Perak e vanit diseblant,
P'emañ aze, er Sakramant,
An Doue ken madelezhus,
Hag evidomp, hollc'halloudus ?

E galon 'vez bepred digor
D'ar re a glask ennañ goudor,
Hag an neb a zo ankeniet,
Gantañ a vezo divec'hiet

Pegen frealzus hag asur
Kaout an Aotrou da bennstur
Neb a ro dezhañ e fiziañs,
N'en devo morse a nec'hañs

Deuit eta, parrezianiz,
D'en em vodañ 'barzh hoc'h iliz
Kouviet oc'h holl d'ar Banvez,
Eno ho pezo levenez.

J.K. Person, 5.12.87.

Errata : Kannadig 60, er pennad a-zivout Darwin, paj. 6, e arroudenn gentañ Darwin, ma vez keñveriet “un troc'h etre ar vorianed” hag “un troc'h etre marmouzien izel-izel”, lenn : “un troc'h strizh-strizh etre ar vorianed” hag “un troc'h ledan-tre etre marmouzien izel-izel...”

Mererezh

12 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h*. (15 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll

an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://kannadig.chez-alice.fr/>.

Skridaozerezh

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù**. Kergreven - 29800 Trelevenez - ISSN : 1144 357X

